

RÉGLAMANT

ar yoankis tré Quimper a guenet.

1

Sclairijen ar perejou roue an env a an douar
Mar ve o madeles da selairat ma memoar
Deus ar sperejou caëra me houlen ho avis
Da hober eur reglamant evit ar yoankis

2

Me a zo eun den yoanc tre Quimper a guenet
Daramprédi eur chaden ar haëra zoer bed
Evel deun eostik joaus e kana de a nos
A ne brassa plijadur hene ar boquet ros

3

Ma mestres zo ravissant evel dar fleur da lis
Barz er plaçou agreabl ren e yoankis
A deus e darampredi ve joaus ma speret
Kaër evel da nevez amzer pa gan ar lapousset

4

Kenta ma gulet ma mestres ma esperans fidel
E voa pourmen barz er foar voar dachen Sant-Mikel
Da vonet da zaludi me leca ma memoar
An agreapla plah yoanc a gerz voar an douar

5

Deus peleh oh plah yoanc na deus a bez canton
Hervai ho aer ma joaus o kalon
Me zo deut do saludi evit clevet o toare
Dre ma ho cavan agreabl eur verh a galite

6

Me zo eur plah yoanc demeus a Vreiz-Izel
Ne non ket eur plah savant na kalite huel
Me a zo brema comans ren ar yoankis
Pehini zo ar haëra demeus ar fleur delis

7

Area eta plah yoanc ma harantai fidel
Stereden ar merhet coant demeus a Vreiz-Izel
Joaus bras ve ma halon ma ve de madeles
Da poursuivi ma honaisans barz no compagnunez

8

Me a zo eur plah yoanc dindan ober ma choas
Yoankic mad a gavan evit demizi hoas
Ar Yoankis zo eur rozen ar haëra zo er bed
Dar re voar e hondu evel e ma glet

9

Arca eta plah yoanc cozamp gant guirione
A houi vezo ma mestres mar ve o polontai
Houi ar boket ravissant ar rozen delicat
Ne anavan ket hani kercouls a houi dam grad

10

So prépojou den yoanc a form an amitié
A réjouis ma halon gant ar fidilité
A me a menz évidoh eur garantai impar
A neus Ket netra Kaëroch tré an env a an douae

11

O prepojou agreabl a blij din ma mestres
A houi vezo ma joaustet ma veh ket traytours
Neuzai ni vo unisset hervai or harantai
A me mo évidoh respet en durant ma bue

12

Naiquet ar ré demézet a ve an évérussa
Rae a boan a cavet tirij n' najou
hae ar re zo tud yoanc kaiguet a vaillantis
zo joaus mont da bourmen da blas ar yoankis

13

Guélet a meus tud yoanc a voa gai a joaus
A goudai mant démézet en nen ga malhurus
Neuzai pa vent demezet e vent clask comandi
Neuzai e ya dar pembedai a lod dar fondirie

14

Area eta plah yoanc contet pesort raison
A me gred ni zo on daon memeus opinion
Klevet a meus alies prépojou an dut fur
Kalz a dud a ya da gol gant re a blejadur

15

Consultet ar re garfet deus ar re savanta
A deus an electourien a zo barz en envou
Ar bedma zo a viskoas poan gorf a hae spere
Naiquet ebarz er bedma ema an evurustet

16

Guélet a oel excelant ar steret a hae ar loar
Splaneden kurius tré an env ac an douar
Med a dud zo diraison a ve en em revolte
Mes ar mor hac an douar a zo nem acordet

17

Da ve an ëol prieuis a deufai da barlant
Deus an amzer aneien a deus an amzer brizant
Tud vad a beb kalite zo evurus asamblais
Evel ma voa hon tud eoz er Barados terest

18

Dont a ra an droug speret da stigma e roujo
A ha la ka jalouzi tre kals a priejou
He hober a ren scandal ebarz en peb fesson
Evit tremen ho amzer ren an daonnation

19

Gredvet plah yoanc elevel o fantazi
 Moh ket galvet evelse da vont da zimaizi
 Dre ho prepojou charmant evel ma peus contet
 Houi dremeno ho hamzer en renq ar seurezet

20

Ar seurezet a zo dija evel tud prisoniet
 A no deus ket libertai da voelet ho mignonet
 A dont a ra o herent da zezir o maro,
 Evit dont da brofita deus ar peza vezo

21

Me a zo eur plah yoanc contant da zimezi
 Pa gafen eun den mad hervai ma fantazi
 Ma ven deus da dimezi gant ma bolontai vad
 Houi vo mar servicher onar vefen do Krad

22

Martrezai plah yoanc peus mignoh a zanve
 A ni vezo separet ba'amour do lignai,
 Gant, kement se aliez a ra separation
 Entre kals a dud yoanc en despet do halon

23

Tud vad gant meurbet danve zeu da veva eurus
 A lod gant eur fortun vras en nem gav Malhurus
 Me gar unan penvidic mechant ag ivrogner
 Ag a zo affer jendarmet evit e hondui dar guer

24

Ar re zo ivrognerrien zo tud bas a speret
 Kar koll a rend ho danve o nerz a ho respet
 Guelet a meus cals a dud a voa pinvidic bras
 Ac a zo deut evelsai bar er baorante vras

25

Me gaf caër guelet eun den e heva eur banah
 Pa ve tranquil e barlant barz er gompagnunes
 Mes an hini ef re demeus ar sort boisson
 Glefai beza kasset dar hraou evit col e raison

26

Ar sa eta plah yoanc konzomp gant vaillantes
 Pa momp digouet assambles da ren or yoankis
 Dre o prepojou charmant a ho er agréabl
 Me gred ni raifai assemblais eur ménaj delicat

27

Ho propojou den yoanc a blih da ma speret
 A me gred a beurz Doue a meum nem rencontet
 Hon peus bed ar vardeles donet dam zaludi,
 A houï vo ma servicher mar vent do fantazi

28

Na pa roët din ar choas deus merhet ar hanton
 Na deus ar re neus passet menez santez Barba
 Houi an hani ma choazet dreist ar merhet all
 Mar vimp on daou unisset ne houlfen ket guel

29

Area eta den yoanc finissomp or homzo
 A la komp or promessai dindan an alhiou
 Mar Mezan ma fantasi evel ma teziran
 Houi vezo gouvernourz voar guement mad a mo

30

Pel amzer voant bed arai hib guelet ma mestres
 Mes na mes ket e ankoet na ne rinkei james
 Ganti e ma ma speret a ma occupation
 Evel eur belec yoanc ho compren e zermon

31

A Ben eur véchal goudai e boa nem rencontet
 E voa deves ar pardon voar dachen ar selerdet
 goudai an offerren bred ho tont deus ilis
 A me veles ma mestres rozen ar yoankis

32

Hi an delicat merh a gerz voar an dachen
 He hamaradez ganti kaër evel diou rozen
 Ya hones evo ma mestres mar ve de fantasi
 A gant eur galon joaus me ya de zaludi

33

Me ho salud feumeulen rozen ar valantis
 Me gred e moh dentama da ren o yoankis
 Pelzo amze zo ari na meus ket o kuelet
 Me gredai e voah maro potramant demezet

34

Me a zo hoas plah yoanc a drugare Doue
 A pa glevan ho comzou me gred e moh ive
 Me na meus nemet eur galon a ganti moh choazet
 A tre ma veh den yoanc me na zimezi-ket

35

Hones a zo eur promess a gonsolation
 Ac a ravis ma speret a joyus ma halon
 Comancet a meus eur chaden evit tarempredi
 A a vezo ma glahar mar ve red e zori

36

Eur chaden ken excellant na vezo ket toret
 Kar dindan an alheou e vezo conservet
 Vit o lad deus ar pardon braima voar ar blacen
 Ric e ran deoh a brezant eur houblat per melen

37

Paleh ema ar blanten demeus ar gouir frésen
 Deus pehani ma zavet eur houblat per melen
 Ma vouefen peleh vefai me yaifai beteck enni
 Pa zeui an névez amzer da glase greffat outi

38

Ma karfah den yoanc dont betec ma her
 Eno eoffah eur greffen demeus ar blanten per
 Bar neur jerdin agréab a zo dirag ma zi
 Eno cafet eur blanten hervai ho fantazi

Da vont betek ho kaër allas ne nafen ket
 Ken a vezo gret entrezou ar promess assuret
 Houi a choazo evit mestres rozen an oll mertiet
 Dima vefai ar goassa ma vefen refuset.

A pa denfai dam goulen unan a gant millscoet
 Houi a choazo drier an oll gant karantai barfait
 Mar beh fidel do comzo halfeh assuri
 Houi a vo ma gervicher mar vo do fantazi.

Ar blacen excellant ma zo bed darempret
 Gant an nomb bras a dud yoanc a neus mem bremetet
 Mes ca'z a bromessaou a ya gant an avel
 Me gred ni vo assembles ma mignones fidel.

Mais allas ar jalouzi a ma nem rencontet
 Pa voan parlant assembles gant ma muia caret
 A gant eun er agreab eta dam zaludi
 A gant eur lans a hlahar e teu dam separi.

O mestres houï den yoanc zo gloriüs a fier
 Mad evit eun artizan pe eur bourbis a gaër
 A pa hefet de goulen e vefet refuzet
 Da dimizi deun all me gred ma accordet.

Ar homzou dinatur a rannai ma halon
 A ha laka ma speret da chang opinion
 Kollet meus an esperanc deus ma mestres fidel
 Laket voa entre an diou evit choas eun all.

Ma ya ma mestres fidel braima da dimezi
 Kavet e deus eur chanc vras hervé e fantazi
 Onnes e voa ma fianc a ma oll joaustet
 Kreis ma brassa esperanc saitu me glaharet.

Pé voant passa vis à vis da chapel ar Folgoat
 A vo lades ma ini mam ar sperejou mad
 Me a denno gant furnes dober reflexion
 Deus ma amzer dremenet a deus ma amzer da zont.

Steraden ar Barados Rouanes an douar
 Me a zo deut do saludi da enori o cloar
 Da houlen o assistenc herve ma fantazi
 Ma permetet dre o kras dont dam honzoli.

Neuzai pa voantocupet laret ma fedonno
 Me glevas eun el eurus disken voar ma skeau deau
 Pedit sklairijen an envou ken vit mont dober o choas
 O havantag ar haerra eau o selvidigues

Avantajou ar bedma zo netra memog^t
 En comparaison d'an hini zo en env preparet
 Ho amzer barz er bedma serten a dremeno
 Allas an eternite jamais na dremeno

Ar voez qenn agreabl sai a douchai ma halon
 Me gred ma digasset evit ma honversion
 Petra rafen mai braima evit o trugaricat
 Deus ho krasso precius zo ken doue a mad

Me a zo eun den yoanc karguet a veleonie
 Ar voez ken agreabl sai a zeu dam honsoli
 A me laka ma fianc en madeles Doue
 Da rei din e azistans herve e volontai

Dont a ray koas ar goukou da gana barz er vro
 Ar jardinou agreabl a deui da fleurisso
 Ac ar lapoussidigou deui de nem gonzoli
 An dud yoanc a beb bro ne nem darempredi

Lapoussidigou joaus eur hoajou tro voar dro
 Houi gan dan nevez amzer ar herra musigo
 O melodi ravissant da vintin a da nos
 A ra dimp an esperans da velet ar Barados

On debes me voa o pourmen voar eur menez huel
 A me vele tro voar dro pareziou breiz-izel
 Eno e meus aretet dober reflexion
 Deus an amser dremenet ac an amzer da zont

Peleh ema an dud sai neus darempred ar vro
 A peleh vimaï eun amzer a vezo
 An dud sai an ber amzer a vezo transportet
 Ac ar menezioù huel a chom no Leah bepret

Ma mefai an esperanc goudai ma vent maro
 Da zont hoas gant plijadur da zarempri ar vro
 Mes hervai an aviel ar vuez ma zo ber
 Neus ken nemet eun dra eb ken a zo necesser

Sant Mikel Arhel fidel patron o el mad
 Me o salud alies dar foar a dar marchad
 Da houlen an assuranc a bonheur eternal,
 Assembles gant ar re evurus patronet breiz-izel

O me gavas souden eur limachit nevez
 Voar behini zo scrivet hano ma harantai
 A me a deu de conservi gant eur respet fidel
 Ema zo dam guir vestres feumeulen breiz-izel.

59

O compren a guement si me a zo estonet
A me glevas eun eostic kana brezonec
Ennes zo eun eostit a gasolation
Hervai ma peus ar pouvoir contet din o raison.

60

Me zo eun eostit konzolant roue ar lapousset
Ac a za da enori ho karantai barfait
O mestres houi den yoanc a zo eur plah charmant
Greden fen ket ve e far barz en departamant.

61

Ar limachit nevez ma pehini meus cavet,
Martrezai houi lapousit en neussan digasset
Mar pefai ar vadeles da vont de saludi
Da gas dezi eur helou herve ma fantasi.

62

Neuzai ar lapousit sai esten e siouaskel
A ya betek ma mestres feumeulen breiz-izel
Hoas teziron aroe ma carfen mervell
Da barlant gant guirionai deus ma mestres fidel.

63

Eun de me voa barz er foar er ger a Guimperle
A me velet ma mestres objet ma harantai
Me o salud feumeulen objet ma harantai
Daost pe joa pe glahar a vezo etrezomp ni.

64

Area eta den yoanc me gred evoah fachtet
Pa voah quet deut dam goulén guis e poa prometet
Goulén a voah a gavet a me a rai eve
Mes houi ai ma fantasi houi ai ma harantai.

65

O ma mignones fidel me a houlen excus
Dime evoa ar goulén o dohu ar refus
Laket e voan da gredi pijai ma refuset
Na da gemer un el houi a zo a zo acordet.

66

Gout a red ta den yoanc ar jalouzi zo bras
Ones zo eur guel soursen a ne vanko ket hoas
Lakat ar gassoni barz tre ar vignonet
A tore ra ar chaden ar garantai barfait.

67

Comansomp eta brema, hon chaden a nevez
A vezo on assurans herve or harante
Ma tremenim on amzer asemblais voar an douar
Evit beza unisset gant doné bars er gloar.

68

Aréa eta goeldeodo pátra peus goneet
E elask dont da separi eur garantai barfet
Collet e peus ho amzer ac uzet bouto
Peus ket goneet netra evit eavet tachou

69

Méo supli tud yoanc pere form a mitie
Kent monei da separi linnét ar virionai
Or jalouzi evelse a ra separasion
En tre ealz a dud yoanc en despet do halon

70

Guelet a meus tud yoanc ae a nem garie parfai
A pa ven digoet asemblais evurus virjent bed
A pa aonet dan den an anter deus ar bed
Ma neus ket a garantai neus ket evurustet

71

Meo supli tud yoanc tre Quimper a guenet
Da vont dar pardonniou kaër gant enor a respet
Eno ema ar blantén demeus ar fleur delis
Ae a ren a beb amzer chaden ar yoankis

72

Savet so ilizou kaër a chapellou santel
pere zo bed darempred gant on tud eoz Guechal
Ae ar re peus darempred dre eur guir garantai
Pedet ma vent evurus da vont asambles gantai

73

Meo supli eanerrien canet gant vaillantis
Bars er plas exellant a ren ar yoankis
Evel eun eostit joas a ganai de a nos
A da veuli gant respet chaden ar boket

74

A houi eve tud yoanc kemerit ar chanson
Pehini zo evidoh eur gonsolation
Ae e pezo ar bonheur evel ma teziret
Da drémen mad o homzer ebarz en evuruste

75

Ar zoma zo composet gant ervoan Kerervé
Deus canton Arzano Canton Loquenole,
Ya ar son ma zo rimet gant eur galon fidel
Entre feunteun ar Folgoat ac e chapel santel

76

A brema pa gomprena me zo Glaharet
Gant an nete dam yoankis pere zo tremenet
Ones ai a haërre hoden deus amzer eun den
Ac a dremenas siouas evel eur lubaden

77

Oll blijadur ar bedma na pa ve destumet
A dremen gant an evel siouas evel moget
Tremen a ra on amzer gant beb sort trubulion
Heuillomp hentan evurustet naiket homa on bro

78

Me a gred gand gras Doue ae ar verhes vari
Ni a vezo hoas evurus herve on fantasi
A pa erruo an eur da gemer or repos
Gras dimp oll da nem voelet en gloar ar Barados.

FIN